

# KANTIKOU

Parouz Sant - Konan



LES PRESSES BRETONNES. — SAINT-BRIEÛC

1954

# Kantik Sant Kaourantin

Kentan Eskop Kerne, ha Patron

---

## DISKAN

O Zant Kaourantin, hon Fatron,  
Eus lein ann env, diwar ho tron  
Zikouret da von da Zoue  
Zan-Konanis, ho pugale.

1. Ni ho salud war hon daoulin,  
Hon Fatron ker, Zant Kaourantin :  
Ra vezo skrivet 'n'hon ine  
Ho c'hano gant ho karante.
2. Zant Kaourantin, c'houi zo hon Tad,  
Ganet enn hon bro, eus hon goad :  
Goad kristenien a reng huel,  
Difennourien grenv Breiz-Izel.
3. Kaourantin, achu he studi,  
Iaouankik c'hoaz, leun a dudi,  
A zavas war lein eur mene  
'Vit pedi gwelloc'h e Zoue.
4. Eno kuzet, pell eus ar bed,  
E kav ar wir evurusted,  
O lenn er Skritur koms Doue,  
Oc'h ober pinijen noz-de.
5. Pa zemple gant naon ha zec'het  
Ec'h è d'ar feunteun viniget,  
Da feunteun gaer ar Peniti,  
Hag e kave eur pesk enn'hi.
6. 'Neur drugarekat, e troc'he  
Eunn tamik euz ar pesk bemde :  
An de warlerc'h e kave c'hoaz  
Ar peskik laouen ha dinoaz.

7. Ar roue Gralon eunn devez,  
O chasseal war ar menez,  
A lare : « Ne vank d'in e ve  
Kaourantin Eskop e Kerne. »
8. Epad triugent vloaz eo bet  
Eskop ha Tad ar Vretonet,  
Eskop Zantel ha Tad tener,  
Hanvel ouz he Vestr hon Zalver.
9. Kaourantin eus lein ann envou  
Diwallet ho tenvedigou :  
Deus skilfou Satan kounaret  
Diswallet-he Zant beniget.
10. Evel gwech-all pa oac'h pastor,  
War al loden-man eus Arvor ;  
Kristenien omp, ha da viken  
E c'homimp stag ous hon lezen.
11. Tud ho parrez a blij dez-he  
D'oc'h iliz daoust d'ho faourante,  
Kinnig bep bloaz ho aluzen  
Hag eva dour eus ho feunten.
12. Pa ve ho pardon he teuomp,  
Oll d'ho kwelet e tiredomp,  
Ha liez e kreiz al labour  
E c'houlennomp c'hoaz ho sikour.
13. Dalc'het ennomp ar vertuïou  
Hoc'h euz prezeget d'hon tadou :  
Feiz, esperans ha karante,  
Gwir binvidigez ann ine.
14. Feiz evit anzav hon Zalver  
Dre goms ha mui c'hoaz dre ober,  
Hep ankouat biken ez omp bet  
A vianig oll badeet.
15. Esperans en hon trubuïllou,  
O sellet trezek ann envou,  
O sonjal penoz hep dale  
E vo tremenet hon bue.

16. *Karante* e kenver Doue,  
E kenver hon neñan ive ;  
Karante d'ann Iliz Santel  
Ha d'hon bro gêr, da Vreiz-Izel.
17. Dreist pep tra, war hon bugale  
Tolet eur zell a drugare,  
Ma talc'hint kerzet war ann hent  
Oc'h euz diskoet d'ho c'herent.
18. Ni fell d'imp bezan douaret  
Aman, tal ho ti er veret :  
Ha mont genac'h oll war an dro  
Da ren eunn deiz enn hon gwir vro.  
  
Evel-se bezet gret !

*Imprimatur* :  
Brioci, die 19<sup>a</sup> decembris 1891.  
M. LE PROVOST, v. g.

## Kantik an Itron Varia Logou

Klenniget d'ar Person koz an Otro Derrien

War don : Kelven.

DISKAN

Ni ho salud a galon vel gwechall on zadou  
Deut omp aman da bedi, da c'houlenn ho madou  
Ouz gwalen ha klenvejou a gorf hag a ine  
O Itron Varia Logou, miret ho pugale. \*

1. Er zioulder ar meziou, mesk ar brug hag al lân,  
Eur chapelig 'zo kuzet war harziou zant Konan  
Gwestlet eo bet d'ar Werc'hez, gwechall gant hon Zadou  
Dindan an hano ken koant : « Itron Varia Logou ».
2. Ar Venec'h en amzer goz 'zavas eur Manati,  
Hanvet oa gante kenkent : « Kouent Zantez Mari »,  
Bretonned ar Meneïou, tre Treger ha Kerne,  
A diskas karet o Mam, war ribl ar « Stang-Neve ».

3. Darempredi 'rent ive Chapel Zantez Barba  
Kerz ar marc'hajou zavet bep miz e-pad ar blâ  
Den n'ije kredet neuze mont d'ar gêr ouz ar Voar  
Hep stoui dirag skeuden Gwerc'hez ar seiz Glac'har.
4. Seiz kant vla 'zo tremenet, ...ar gouent 'zo goulou  
Ec'h mogerioù dispennet a ziskoue he zruillou  
Distrug chapelioù ar Zent a zo c'houerv da zibun  
N'er ken da Zantez Barba vit pehat ar c'hurun.
5. 'Vit chom gant he bugale damdost d'an « Abati »  
Ar Werc'hez n'euz euz dibabet eul lec'h d'ober he zi  
Eno e teuer bepred da bedi ar Vam vat,  
Ar birc'hirined a gav diganti o mennad.
6. Eun de kentan a viz Mae, bandenioù bugale,  
Ve digaset d'ar « Logou » war c'hlisten ar beure  
Dirag oter ar Werc'hez, ar Mammou ra peden  
Da c'houlen komz ha kerzed 'vit o c'hrouadurien.
7. E skourr ar mogerioù kor, klanvourien pareet  
N'euz stignet bijer, vlaioù, testeni ar iec'hed  
Kaëroc'h bennoz a zisken war ineou gloazet  
Gant klenved an techou fall hudurnez ar pec'hed.
8. War drem skeuden an Itron eo livet an anken,  
Da bep hini ac'hanomp 'm'an dalc'hmat o kelen  
Da ziwall koll er bed 'man tensor ar garante  
Da c'honit evurusted en Baradoz Doue.
9. Lakomp eta hon fiars er Werc'hez truezus  
N'eur ginnig dre he douarn hon c'hlemmou da Jesus  
C'hi eo Mam an dud poaniet, pe gwir war ar c'halvar  
'Peur c'honeas an hano : « Itron ar seiz Glac'har ».
10. 'Koulz hanter Miz Gwengolo 've gouël braz er Chapel  
Ar pardon a zo brudet hag a dost hag a bell  
Zant Gili, Kerpert, Senven, Plijidi, Zant Konan  
D'an Itron Varia Logou ' lavar ar memez kan.

19 Août 1925.

B. L.

*Imprimatur :*

Brioci, die 3<sup>e</sup> Septembris 1925.

Y.-M. LE PENNEC, vic. gén.

## Kantik An Itron Varia San Konan

War don : Ker Is.

### DISKAN

Itron Va-ri-a San-Konan,  
Bezeta karet gant peb-unan,  
Bezeta meulet, mamm gloriüs,  
Pedeta vidomp, mamm galloudus.

1. Araok pec'het hon zad Kentan,  
Na kaer gwelet en em hentan,  
Vel mignoned, dousat bennoz,  
Doue ha den war dro serr-noz !
2. Eürus an den, cürus Doue,  
Frank ar palez, uhel roue,  
Kalz uheloc'h 'vit ar stered,  
Tost d'an êle dre nerz-spered.
3. Gwerc'h en e gorf, glan a ine,  
Gwenn-kan n'e sav vel eur mine,  
Leun a furnez, leun a zoujans,  
Disoursi mat vit ar bevans.
4. Karantezus egiz eun oan,  
Kuit a glenved, kuit a dam poan,  
C'hoaz am mije da desrevel,  
Perc'hen peb tra, den divarvel.
5. « Ia, me Doue, dre holl renet,  
Ouzoc'h netra neus difennet,  
Netra nemet eur wen avat,  
Gwen skiant meur an Drouk, ar Vad.
6. Dirvalet da danvat outi,  
Blaz ar maro vezo ganti,  
Pac'h on ar Mestr, Mestr me a vir  
War freuz ar wen ar strisan gwir. »
7. Re splann, siouas, an heol bare  
Eur goumoulen 'zeu hep mare,  
Dioueskel Satan en em led,  
Kollet an den, kollet ar bed.

8. Ijin Doue' zo dreist muzul,  
Na piou d'Ezan a rei kuzul ?  
Eur plac'h an eus hon diskaret  
Ha gant eur Plac'h vimp rikouret.
9. Raktal goude pec'het Adam  
Doue promet eur wreg dinam,  
A flasro penn diaoul an Ifern,  
Eur stereden breman lugern.
10. Eva chilaouas an Drouk-El,  
Mari chilaouo Gabriel,  
Eva rez lans d'an Enebour,  
Mari rei lans d'an eil labour.
11. Labour bec'hus Salver an holl,  
N'houllou gwelet o vont da goll,  
Ar brassan deus ar bec'herien,  
Ar gwassan deus an nac'herien.
12. Pechou Satan 'vo distignet,  
Hon madou devoa dispignet,  
An eil Eva, gwerc'hez ha mamm,  
Gant he mab ker 'zougo ar samm.  
.....
13. Nag a gantvet zo tremenet,  
War ar bed paour ken dispennet !  
Paouezet, paouezet da c'hlaç'hari  
Sell goulou-deiz, ia, sell Mari !
14. San-Konanis, c'hwi a lavar :  
Bravat parrez, ken disafar,  
Diou stank, eur was ha pet gwazig,  
Pet eva er c'hoad ha pet neizig ?
15. E kerz miz Mae, ar bleun digor,  
Bleun ar balan, bleun al lann-gor,  
Astenn mantel eur rouanez,  
War dioukoaz noaz hon zamm parrez.
16. Mistr ar saonen gant ar glazur,  
Foen flour ha dru, mez a dra-sur,  
Koantoc'h dindan lagad ar mestr  
Ed luskellet gant avel èst.
17. Me oar, me oar, an alc'houeder  
Ac'han a sav, skiltr, dibreder,  
Pet kwech harpet ouz rec'hier koz  
Meus he heuilhet a roz da roz !

18. Hag ho kleier mar n'int ket rust,  
A glot ken mat, a gan ken just,  
Ho tud n'ho raok, ouz o c'hlevet,  
Kanvas pe drant o deus bevet.
  19. Klasket, klasket San-Konanis,  
Biken, biken n'halfet fornis,  
Nag e rafec'h tro kant-parrouz,  
Netra ken kaer, ken mat, ken dous !
  20. Netra ken kaer, ken mat, ken dous,  
Vel rouanez ar Baradous,  
En he c'hichen, me gav dister  
Perlez ha gliz, bleun fresk ar ster.
  21. An heol pa darz e sklerijenn  
Etal d'eï 'zo tenvalijenn,  
E-lein an oabl, e fons ar mor  
Neus bet ha ne vo seurt ten sor.
  22. Biskoaz Mari gant ar pec'het  
N'eo bet an disteran broudet,  
Samm ar pec'het 'chach d'an douar :  
Ar maro kri, dall ha bouar.
  23. Ar plouz a lar keno d'ar greun,  
Ar c'horf zistag gant poan ha keun,  
Korf ar werc'hez hag ha ine,  
Divlamm ha skanv a sav d'an Nê.
  24. Kanet Ele, Kanet holl sent,  
Kanet kristenien war an hent,  
Gloar da Vari, gloar da Zoue,  
D'on Rouanez, ha d'hon Roue !
- Peden d'Itron San Konan.*
25. Gwerc'hez Vari, teulet eur sell,  
War eur barrez a Vreiz-Izel  
Ho meul laouenn e-kreiz ar c'han,  
Teulet eur sell war San-Konan.
  26. Bellet, O Mamm, war ar Bugel,  
Elig dinam en e gavel,  
Goude pan eï d'ar c'hatekiz,  
Miret-han fur 'ne yaouankiz.
  27. Hon binniget 'kreiz al labour,  
War e wele an den klanvour,  
Roet souten, d'ar vamm, d'an tad  
Ha sikouret peb ti, peb stad.

28. Herve ma neus ho Mab laret,  
Desket d'imp holl en em garet,  
An eil d'an all rei dorn dalc'hmat,  
En ti, er porz, er park, er prat.

29. Pa zono an heur da guitât,  
Deut da serri hon daoulagad,  
Douseit vidomp ar c'henavo,  
Digoret d'imp dor an Nen vo.

A. LORICHER,  
*hanv 1954.*

E-kerz blavez ar Werc'hez.

*Imprimatur :*

Brioci, die 15<sup>a</sup> Julii 1954.

Y. BROCHEN, *vic. gén.*

---

La paroisse de Saint-Connan a comme Patronne la Très-Sainte Vierge Marie dont le pardon se célèbre le 15 Août.

Le Titulaire est Saint Corentin, 1<sup>er</sup> évêque de Quimper. Le diocèse de Cornouaille s'étendait dans sa partie N.-E. jusqu'au Trieux. Saint-Connan formait la limite. On a dit avec raison que les vieux Evêques de Quimper et de Tréguier montaient la garde sur les limites de leurs diocèses. A Senven-Léhart, en effet, Saint Tugdual a sa chapelle.

L'église de Saint-Connan possède une Relique de Saint Corentin. Une belle fontaine connue sous le nom de Fontaine de Saint Corentin se trouve à l'extrémité du bourg.

Le pardon de Saint Corentin se célèbre le 12 décembre.

Saint-Connan ne conserve plus qu'une chapelle : celle de Notre-Dame du Logou.

La chapelle de Notre-Dame de Logou est située sur les limites de trois paroisses (1), dans un site ravissant, tout proche de l'Etang-Neuf et de l'ancienne abbaye cistercienne de Notre-Dame de Coatmalouen.

L'Etang-Neuf (Stang-Nevé) était jadis un centre commercial de première importance. Là se tenaient les plaids généraux, des foires, des marchés fréquentés. Une chapelle, dédiée à Sainte Barbe, a disparu. Les ruines de l'abbaye, les bois, l'étang font de ce coin de Saint-Connan un des plus jolis paysages de la région.

(1) Saint-Connan, Kerpert, Plésidy.